

**KIS-841** – Br. **boudig** (p. 67), hBr. **banleu** (p. 67),  
Gl. **caduc** (p. 68), **malformation**, Et. **terato-** (p. 69),  
Gl. **dimorphisme** (p. 71), **chat de gouttière** (p. 71)

(GE da YBQ – 04 02 05)

## **BOUDIG**

Evit *boudig*, diaes eo degemer ur c’heñver gant ar verb *bout* : 1) testet eo *boudig* ken abred hag an 18<sup>t</sup> kantved (emañ e GReg., 1732) ; 2) ar verb *bout* ne zeraouad arverañ evel pennanv oc’h arouezañ ur beziad nemet en 20<sup>t</sup> kantved<sup>1</sup> ; 3) ar verb *être* ne voe arveret evel pennanv oc’h arouezañ ur person nemet e 1780 (koulskoude, ar brederourion, DESCARTES pergen, a droe La. *ens* dre ar pennanv *être* adalek ar 17<sup>t</sup> ; hiziv en en troont dre ar pennanv *étant*) ; 4) *boudig* zo benel.

Un durc’hadur all a c’hallfe bezañ d’an imbourc’h gerdarzhel, arzaeladus bras moarvat e diarsell ar Yezhoniezh. Eus La. *Fata* b. "doueez an tonkad" (La. *fatum* "tonkad") e teu Gl. *fee* ; an un gerdarzh zo da Kb. *ffawd* b., Br. *feud* (roet gourel ent tidek gant NDBF). Pa ouzer ar c’heveskemm a vez aliezik e predeneg etre ar soniadoù [b, m, v, f] hag [aw, ow, u, o, O], e c’haller soñjal en ur gerdarzh La. *fat(a)* → Br. *boud(ig)*. Ur yezhoniour a rofe e ali.

(GE da RLN – 07 02 05)

## **BANLEU**

hBr. *banleu*, spisc’h. « leno » "houlier". Dezneuziet gant GP *banlev*. Da gedrannoù d’ar ger : *ban* "maouez", furm nes da *ben* a gaver e Br. *eben*, *benel*,

---

<sup>1</sup> VALL (1931) eo, ma ne fazian, a ro ar reveziadenn gentañ : “**être** [...] subs. (un) — *boud*, *beza*, *bezout*.” Kv. GREG. (1834) : “**être**, ce qui existe, l’être, *ar beza*, *ar vuëz*, *ar bezançz*. Van. *er vuhe*.” GON.FB (1847) : “**être**, ce qui est, ce qui existe. La vie. *Ar béza*. *Ar vuez*.” “**être**. Personne. *Dén*.”

*benevel*, h.a. ; *ban* a gaver e *banvez* (-vez o tont eus *gwest* a dalvez e kembraeg, etre sterioù all, "rest, feast, banquet", sl. La-08 321) ; Br. *banvez* zo enta "pred fest en enor d'ar vaouez" ; *lev* a gaver e Br. *leviañ*, *levier*, h.a. — "levier maouezed" enta. Diaes e ve adkemer *banlev* er yezh kempred, en askont eus ar ger all *bannlev*...

(MME ha GE – 15 02 05)

### CADUC

[MME] En un eskemm lizheroù hor boa lakaet ar gaoz war Br. *dibourc'hidik*. Se oa evit GBAHE. A-benn ar fin ne voe ket miret ar ger war ar roll, n'ouzon mui perak. Soñj 'm eus bezañ skrivet deoc'h evit goulenñ ha mat e vefe ober gant Br. *pourc'hidik* evit ar c'hontrol. Respontet ho poa ez eo *trebadus* ar ger d'ober gantañ. Ha padal em eus bet tro da welet e DAGB63 34 ho poa graet gant *dizibourc'h*. Petra soñjit ? Daoust hag implijout a c'heller an hevelep ger pa gomzer eus ar gwez hag eus an delioù ? E galleg ez implijer ivez Gl. *caduc* evit brankoù ar c'hirvi.

[GE] E gwir, edo aet diwar va eñvor an termen *dizibourc'h*. O lakaat ne 'm bije ket e ankouaet, n'eo ket sur e 'm bije e ginniget en-dro. Gwell hepkoriñ an nac'hañ pa c'haller. Marteze n'eo ket dav disteurel *dizibourc'h*. Ken bras eo an ezhommoù a dermenoù skiantel ma kaver fred alies da c'herioù sellet da gentañ evel heñvelster.

Gwir eo e reer gant Gl. *caduc* evit brankoù ar c'hirvi... hag evit glaourgenn ar grozh. Gl. *caduc & décidué* ha Sz. *caducous & deciduous* a vez arveret evel damheñvelsterioù hep ma klotfe bevennoù an arverioù etre an div yezh. E kembraeg e welan e kinniger *deilgoll, collddail*. Diwar ar skouer-se moarvat e kinnigis *kollgenn* e GEVE.ms a-dal da *membrana decidua, membrana caduca* (eus ar grozh).

Dre ar bajenn **caduque** eus GEVE.ms a eilskrivan amañ dindan e weli skalfad an termenoù a c'haller luniañ er stregor-se. Evit dasparzh an termenoù hervez an ezhommoù en diskiblezhioù diseurt e ve ret ren ur studi ledanoc'h ha donoc'h eget a c'hallan ober bremañ. Dit da welout hervez an ezhommoù dibarek a 'c'h eus...

**caduque, caduque utérine, déciduale, membrane caduque, kollgenn g.** Lodenn eus glaourgenn ar grozh a vez skarzhet a-ser gant an dorzhienn goude ar gwilioud

**caduque basale, sérotine, utéro-placentaire, kollgenn a-ziaz.** Rann eus ar c'hollgenn e diastok speur ar grozh diouzh un tu, haen diaz an dorzhienn diouzh an tu all, kevastenn enta da leur enkrapañ an dorzhienn.

**caduque pariétale, vraie, utérine, kollgenn a-speur, gwir, a-grozh.** Rann eus ar c'hollgenn o c'holeiñ kavenn ar grozh a-dal d'ar rizhell hag o vont kempeg gant ar c'hollgenn asplegek.

**caduque menstruelle, kollgenn miziaouel.** Lodenn eus glaourgenn ar grozh o tisglenañ gant ar mizioù.

**caduque réfléchie, capsulaire, fœtale, ovulaire, kollgenn asplegek, kollgenn a-vi.** Rann eus ar c'hollgenn o c'hronnañ ar rizhell e tu oaled ar grozh hag o vont kempeg ouzh ar c'hollgenn a-speur, o kas da get kavenn ar grozh.

**caduque : ponte menstruelle de la** – [Sz. *deciduation*], *diskollgennañ (mizioù), disglenañ ar c'hollgenn*. Skarzhañ glaourgenn ar grozh da geñver ar mizioù.

Un tun dec'heriañ zo e treug steriañ *décidual, caduc* : ar c'heal "kouezhañ" zo enno, nemet gant ur vodelezh dibarek : *membrane caduque, feuilles caduques* a dalvez "ur glaourgenn, delioù a gouezh en un ampoent savelet". Bezant eo ar c'hemeradur e La. *caducus* a dalvez "o kouezhañ / bet kouezhet / a gouezho". E kemm, *deciduus* a dalvez "o kouezhañ / kouezhet". E brezhoneg e c'hallfed ober gant an amc'heriañ o tivrazañ an treug : *ar-* (*argouezh*), *-us, -idik* (*kouezhus, kouezhidik*), pe gant stirannoù all (*adavus, dibourc'hidik, disglenus, skarus, deadus, diankus*), *he-* (*hegouezh, heskar, hegoll*), en ur gontañ war ar sturiañ evit an hestiañ diwezhañ. Gwell 'm eus kavet krennañ war dennad divrazañ an treug, luniañ ur pennanv diwar an div gedrann oc'h arouesaat an daou geal pennañ : (*glaour*)*genn, koll*, o lezel andec'her ar vodelezh. Kement-mañ ne vir ket a luniañ termenou resisoc'h oc'h aroueziñ ar c'houezhañ e unan eus ar glaourgenn : *disglenañ, adaviñ, deadiñ*, h.a. pe an adanv o verkañ ar perzh arc'hwelel kouezhañ en un ampoent savelet.

## MALFORMATION, TÉRATO-

[MME] Ne gaver koulz lavaret mann ebet e brezhoneg a-dal da Gl. *malformation*. Evit a sell Gl. *tératologie, -giste / -ogue, -gique* e kaver :

VALL *treuskorfegouriez*, *treuskorfegour*; DCFB *euzhelouriezh*; NDBF *teratologiezh*, *teratologek*. Tri c'hinnig disheñvel... Marteze e c'heller berraat kinnig DCFB. Sed a ginnigan :

Br. *euzhouriezh*, *euzhour* ha mirout ar stummoù etrevroadel oc'h ouzhpennañ *teratologour*. Tu zo ivez da loc'hañ diwar Br. *iskis*, ha kinnig : *iskizouriezh*, *iskizour* (VALLÉE en doa soñjet se ivez, cf. GIBR *iskizadenn*) pa 'n em soñjan ez eo se a gavan dereatañ ha mirout deveradoù euzh evit *monstr-*.

Ret eo gwelet ivez ez eus deveradoù all da Gl. *térato-* ha ne vast marteze hini eus an diskoulmoù a-us. Petra 'soñjit ?

[GE] Evit nesaat ouzh tachenn an deveradoù diwar Et. *terato-* e ranker deskrivañ un tared ledanoc'h. Emeur aze dirak direizhoù an neuziadurezh (Et. *morphologie*).

En derez kentañ emañ Br. *kammneuziadoù* (Gl. *malformations (congénitales)*, Sz. *malformations, congenital defects, deformities*) eleze an distresadurioù korfadurel ganedigel da heul ur wariadenn eus diorren ar rizhell. E galleg e tiforc'her *malformation* bepred ganedigel diouzh *déformation*, distresadur c'hoarvezet goude ar c'hanedigezh (e saozneg, e reer gant *deformity* en daou gemeratur, met gant *malformation* gant an un ster hag e galleg). Kinniget 'm eus Br. *kammneuziad* b. da envel an distresadurioù ganedigel ha *disneuziad* b. da envel an distresadurioù goude ar c'hanedigezh.

En eil derez, pa vez grevus ar c'hammneuziadoù, pa roont d'an hinienn un neuz disheñvel betek re diouzh an neuz reol, e komzer eus Gl. *monstruosité, caprice de la nature*, Sz. *monstrosity, lusus naturae, teratism*, Al. *Naturspiel, Missbildung*, hag e reer eus an hinienn ur Gl. *monstre*, Sz. *monster*, Al. *Missbildung, Missgeburt* (dav merkañ ne lakaer ket kemm en alamaneg, ac'hoel e par an termenou, etre an daou zerez grevusted, pa reer ivez gant *Missbildung, Fehlbildung* a-gevatal da Br. *kammneuziad*).

E brezhoneg, e kinnigan an adanv *euzhek* hag ar pennanv *euzheg* g. da arouezñ an hinienn bet ganet gant ur gammneuziad vras ha grevus (bezañs daou benn, darn eus an empenn en diavaez eus ar c'hloppenn, h.a.), hag *euzhegezh* b. da envel an kez kammneuziad. Diwar se an diskiblezh o plediñ gant an euzhegoù a ve an *euzhegouriezh*. Kement-se ne virfe ket a ober ivez gant Br. *teratologiezh* (evit Br. *euzhegour, teratologour* n'ouzon ket hag

arveret kalz e ve an termenou-se, nemet marteze evit an imbourc'herion arnodva, embregerion kalvezderioù o tec'han euzhegezhioù hag euzhegoù).

Un niver termenou a zevever diwar Et. *terato-* :

Gl. *tératencéphalie*, anvad rumm an euzhegezhioù o tizhout an empenn (ar c'hlopenn) (Br. *euzhempennegezh*, an euzheg o vezañ *euzhempenneg/k*, *teratenkefaleg/k*) ;

Gl. *tératoblastome*, kankr o tizhout kelligoù 'zo er rizhell, Br. *terato-blastom*) ;

Gl. *tératogène*, o tec'han euzhegezhioù, Br. *eusheiat* aa., *eusheiad* g., *teratogen* ;

Gl. *tératogénèse*, *tératogénie*, Sz. *teratogenesis*, termenou a zo dezho daou generadur :

a) ardarzh (= argerzh furmidigezh) an euzhegezhioù, Br. *euzhardarzh*,

b) devouderezh euzheg(ezhi)où (kleñvedel pe arnodel), Br. *eusheiadegh* ;

Gl. *tératome*, Sz. *teratoma*, yoc'henn o c'hoarvezout eus gwiadoù kevarall diouzh gwiad an organ ma kreskont, dre ma teveront diwar gelligoù rizhellel aspadet er bevedeg, Br. *teratom*, h.a.

### DIMORPHISME

[MME] Ha pledet ez eus bet gant Gl. *dimorphe*, *dimorphisme* (*sexuel*, h.a.) ?

[GE] Gl. *dimorphisme* a denn d'an *neuziadurezh* : bezañs eus daou neuziadur diforc'h evit ur spesad loenel pe struzhel, Br. *divneuziegezh* (*revel*, h.a.) ; Gl. *dimorphe*, Br. *divneuziek*.

(YBAN ha GE – 25-26 02 05)

### CHAT DE GOUTTIÈRE

[YBAN – 25 02 05] Anv zo eus ur "c'hazh a ouenn dianav, amspis ha boutin", eleze ar c'hontrol eus ur c'hazh a ouenn. VALL : “**race** [...] (homme) de — noble *a wad uhel*, *uhelwad*, *uhelouenn* ; [...] (en parl. des animaux) — croisée : *orin-kroaz*”. Hag un dra bennak a ve da dennañ alese ? Lavaret e vez ivez *a ouenn rik*, *rik a ouenn*. Soñjal a ran er rakger *am-* a verk

ar c'hemmesk (amrev, amliv), un doare kontrol (amc'houloù), ur c'hennotadur disprius (amgin), an dispister (amster)... A se e kinnigfen a-walc'h Br. *kazh amouenn*, o talvezout *kazh a ouenn amspis*, *amspis e ouenn*.

[GE – 26 02 05] Ar geriadurioù a ro ar c'hevatalioù-mañ da Gl. *chat de gouttière* : Sz. *alley-cat*, Al. *Dachhase* (?). An termen gallek zo idiomatek ha kennotañ a ra ur stuzegezh kêrel (e mereurioù ar brezhonegva ne oa ket boas ar c'hizhier da bourmen war an toennoù ; o gwelout a raed, a reer, er porzhioù) ; er stuzegezh kêrel e talvez *chat de gouttière* kement ha "kazh doñv ordinal" (ivez Sz. *ordinary domestic cat* termen roet gant ar geriadur, evel despizadur kentoc'h eget termen en arver boutin) ; Br. *kazh amouenn*, ya pe *kazh boutin*.